

Madelez ar Galon-Sakr

RELIGIOSO

Va Je - sus a zo - kous - ket; E pa - lez
 an Drein - det; An oll zent hag an e - lez
 Di - ra - zan daou - li - net; Mes e ga - lon 'zo di -
 hun, hag euz an env e par, E -
 vel an heol ben - ni - get war oll dud an dou - ar.

Va Jezuz a zo kousket... E palez an Dreindet
 An oll zent hag an elez diraz-hañ daoulinet ;
 Mes e galon zo dihun, hag euz an nenv e par,
 Evel an heol benniget war oll dud an douar.

Va Jezuz a zo kousket etre divrec'h e Vam,
 Henvel ouz an distera a vugale Adam ;
 Mes e galon zo dihun, hag evit ar pec'her
 E promet rei da Zoue, goad eun Doue Sálver.

Va Jezuz a zo kousket, ha n'en deuz ken kavel
 Nemet douar ien ar c'hraou digor da beb avel ;
 Mes e galon zo dihun, ha war ar plouz kalet
 E red ar c'henta daélou en deuz Jezuz skuillet.

Va Jezuz a zo kousket, skuizet gant e labour
 En ti paour a Nazareth evel eur micherour ;
 Mes e galon zo dihun, ha ne gavo-repoz,
 Ken na velo evidomp digor ar Baradoc.

Va Jezuz a zo kousket, kousket war bag sant Per,
 Diruillet gant an tarsiou e kreiz eur barr-amzer ;
 Mes e galon zo dihun : reizet an avel-forz,
 Hag ar vagik digouezet heb drouk ebarz ar porz.

Va Jezuz a zo kousket : eur groaz eo e wele ;
 Eno en deuz her staget tachou ar garante ;
 Mes e galon zo dihun hag a skuill war ar bed
 Ar goad sakr a dle renta d'an ene ar yec'hed.

